




Gwened. Aman e trido Bleun-Brug Bras 1954

PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug

Niv. 69 (Miziek-Mensuel)
Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

MEURZ 1954

KLEVIT 'TA !! ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1954 ?

Eun tammig bolontez vat, mar plij, ha pep hini en em gavo eürus : o'houi da veza paet ho tle, ha ni da c'hellout mont war-raok. — Koumanant ordinal 500 lur — a enor : 600 l. — madoberour : 1.000 l. — V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist. C. C. P. 544.22 Nantes.

TAOLENN

Ar Werc'hez Vari hag ar Vretoned (Ao. 'n Eskob Fauvel).....	1
Lezenn ar Vuhez (L. Bleunven)	2
Kenteliou d'an dud yaouank (L. Lok)	3
An dolmen torret (V. Favé).....	4
Ar brasa torfetour (V. S.).....	5
C'hoarzomp (Y. Dantec)	6
Intañvez Goezeg (Yeun ar Gow)	7
Penaos e varvas an ao. Schmitt (Ronan Kermene).....	8
Korn al liziri	9
Al labour douar e Breiz (Ao. de Guebriant).....	10
Buhez ar Bleun-Brug (V. Seite)	11
Keleier	13
Aradeg (Laouenanig Breiz)	15
Eun arzour breton : Per Nedelec (Y. ar Gow).....	16
Meulgan ar C'horaiz (M. G.)	18

YANN AN HOLL EZOMMOU

« An den, pa ra dalc'hmat diouz e gorf, a deu da groui ennañ eur bern ezommoù. En em voaza 'ra d'en em wiska tomm, hag e teu da gaout ezomm da zougen eur samm dilhad war e gein ; en em voaza 'ra da zibri ha da eva etre e brejou, hag e teu hag e karfe beza o lipat eun dra bennak epad an deiz ; en em voaza 'ra diouz an evachou kreñv, hag e teu hag e rofe e lagad evit kaout eur banne ; en em voaza 'ra diouz ar butun, hag e teu hag e rafe eul leo evit kaout eur c'horniad ; en em voaza 'ra diouz kant ha kant tra evelse, hag e c'hellfe tremen brao bras hepdo, hag e teu da veza Yann an holl ezommoù.

N'eo ket evelse eo e rae ar sent ; e-lec'h ober diouz o c'horfou, e c'hourc'hemennent d'ezo hag an dra-se ne vire ket outo da veza yac'hoc'h ha da veva kosoc'h eget ar re a goll o amzer o voumounat o skianchou.

Eul loen dreist eo ar c'horf da zougen an ene d'ar baradoz, gant ma vezo gwestegn mat en e c'hinou ha kabestr berr war e ziskoaz ; a-hent-all e roio lamm d'an neb a zo warnañ. »

Y.-V. PERROT, en e « Vuhez ar Zent ».



Ar Werc'hez Vari hag ar Vretoned



HAG ezomm a zo da boueza kalz evit diskouez pegen doun eo sanket an devosion d'an Itron Varia en hor bro Vreiz ? Bez ez eo eul lodenn eus teñzor presiusa hor gouenn. N'eus ket eun iliz nag eur chapel, en hor parrezioù, ha na ve enoret enni eun imaj pe eur skeudenn eus ar Werc'hez santel. Hor skeudennourien goz o deus, alies gant ijin, lakaet anezi dirak hon daoulagad, gwech yaouank ha sentus e kichen he mamm, Santez Anna ; gwech stouet, izel he fenn, o reseo gant doujañs kelou mat an Arc'hel ; gwech o tiskouez d'eomp ar Mabig Jezuz etre he divrec'h ; aliesoc'h c'hoaz marteze, beuzet en he glac'har, gant korf maro he Mab ganti war he barlenn.

Na lezit ket, va Breudeur, an dremenidi hag ar rederien bro hepken, da gaout brao ar pezh labourou kaer-se. Eun testeni int, eun testeni padus ha gwirion eus devosion hon tadou koz. Dirak ar skeudennou-se, hon tud a zo deuet, a rumm da rumm, da bedi a-wir-galon. Tra-walc'h eo d'eomp sellet outo, hon unan, gant karantez, evit lakaat da darza, eus hor c'halonou, pedennou birvidik d'hor Mamm eus an neñv...

Pedomp, er bloaz-mañ dreist-holl, ar Werc'hez, koñsevet hep pec'hed, da skoazella hon tud yaouank : « Nerz he deus, eme an Iliz, en he ofis, evel eun arme renket evit an emgann ». Plijet ganti gounit d'he bugale nerz kalon da stourm ha da drec'hi, hervez lavar hon tadou koz : « Kentoc'h mervel eget beza saotret ! ». Plijet ganti o sklerijenna diwar-benn kaerder hec'h ene glan, chomet dinam, ha rei d'ezo ar volontez start da ziwall mat an teñzor kuzet o deus resevet er Vadiziant, pa voent graet bugale Doue ha memproù Jezuz-Krist.

(An Ao. n' Eskob FAUVEL, en e Lizer Koraiz.)

LEZENN AR VUHEZ

EVIT ma vezo frouezus hol labour, en tachennou fiziet ennomp, kenta hon eus da ober, ni kristenien, eo klask reizha hor buhez hervez ar c'henteliou, a fell d'an Iliz, Mamm ar Wirionez, rei d'eomp, a-hed ar bloaz : « **An nep ne sent ket ouz ar stur** »

« **Ouz ar garreg a yelo sur** », a lavare ar re goz.

Hogen ar pezh ma c'hoanta an Iliz deski d'eomp, war dreujou an nevez amzer, d'ar mare ma weler dija, a-ziabell, goueliou Pask o c'houlaoui, eo kentel vras ar binijenn, lezenn rust ar sakrifis.

« **Ma ne deu ket ar c'hreunenn winiz da vervel en douar, e chomo he-unan, met ma varv... neuze e tougo frouez.** »

An dra souezus-se a gavomp bemdez dirak hon daoulagad. Ar vuhez a darz eus ar maro. Gwir eo kement-se eus an had, ken gwir all eus buhez ha labourou an dud.

Ar vuhez he deus evel ezomm eus ar boan, eus ar maro evit sevel uheloc'h, evit kemeret eul lañs nevez da vont war araok.

Evel-se ez eo c'hoarvezet gant Hor Salver, evel-se e rank c'hoarvezout gant ar c'hristen, a fell d'ezañ kaout perzh en e veritou.

Hag eta ar pezh a c'houlenner ouzomp, edoug sunveziou ar C'ho-raiz, eo lakaat ar maro en hor c'halon : diskar an techou direiz a zo lojet enni, distruja rouantelezh ar pec'hed hon dalc'h distag diouz Doue ha chadennet ouz karr an Droug-Spered.

« Yun, ober pinijenn, evit petra ! eme galz tud, hirio. Peoc'h d'eomp-ni gant sorc'hennou a c'hiz koz, poan a-walc'h hon eus evel-se, evit kaout ar gwir da vevañ en hor roll !!! »

Komzou diboeil ha digristen a zo aes anaout peseurt frouez a sav warno.

Ni 'oar eo fur an Iliz hag emañ ganti Spered Doue. Ma c'hourc'hemenn d'eomp beza rustoc'h ouzomp hon unan, en amzer-mañ, hag heulia pisoc'h lezenn ar binijenn, n'eo nemet evit rei an tu d'eomp da yac'haat hon ene, hor sikour d'en em drec'hi gwelloc'h hon unan, da lakaat urz vat en hor buhez-den, ha da dañva, dre-se, muioc'h a eürusted.

Abred pe ziwezât hor pec'hejou a zo atao had daërou. Petra c'hell beza talvoudusoc'h d'eomp eget klask kaeat outo ?

Gouzout a reomp, a-hent all, betek pelec'h e c'hellomp beza kaset gant hor plegou hag hon techou direiz !

M'he deus an Iliz souplañ, bremañ, he lezennou evit ar pezh a sell ouz ar yun hag ar vijil, n'he deus ket, evit-se chenchet an Aviel : « **Ma ne rit ket a binijenn, ne c'hellot ket beza salvet...** »

Goude beza bet diskennet eta doun ennomp hon unan, hag anavezet ar siou fall a goll ac'hanomp, skoomp dizamant warno.

Eun taolig, beb an amzer, skoet war wrizioù ar wezenn a ra d'ezilaoskaat. O stourm hag oc'h enebi aketusoc'h, epad ar c'ho-raiz, ouz al lorc'hentez hag ar garantez re vras hor beus evidomp hon unan, ni ziwrizienno, tamm ha tamm, ar plegou direiz-se eus hor c'halon.

Ar c'hristen a dle tremen dre vez ar binijenn, epad goañv ar c'ho-raiz, en em zizober diouz ar goell koz a zo ennañ, evit adsevel kaer ha flamm, evel Hor Salver, pa dregerno kanaouennou laouen an Alleluia, da zul Fask.

L. B.

Kenteliou d'an dud yaouank

An teodou fall.

Adal ma vez darempred etre daou zen yaouank ha pa dosta an embannou, gouzout a rit koulz ha me emañ mare an teodou fall da deurel o binim ha n'eus remed ebet ouz o flemm goude ma vezo kalharet gantañ hoc'h enor.

Awechou koulskoude ne sko ket re fall. Gwir eo ez eus tud hag a glask tro da veza flemmet. D'ar re-se e talv va c'huzulioù muioc'h eget d'ar re all, rak alies e vez asant gant an daou zen yaouank.

Re alies ive allas ! war ar maez dreist-holl, paotred yaouank a zo da veza tamallet. Torfetourien ha n'int ket trec'h d'o youlou fall. Laeroun glanded hag a oar n'eus na lezenn-gouarnamant nag archer d'o c'hastiza. Treitourien eta hizio ha treitourien warehoaz ha goude ma timesfent d'eun all. Merc'hed a zo ivez, rouesoc'h dre c'hraz Doue ha ne bakont nemet ar pezh a glaskont.

Arabad eta ober atao skouarn vouzar ouz ar brud, gwall pe vad.

Kenteliou diweza.

Allo ! ta, tud yaouank, termen gant seurt diotachou ! klaskit an tu da lakaat ar peoc'h da ren etre ho familhoù. Bennoz Doue a vezo lavaret d'eoc'h war ar mare-had ha Doue a skuilho e vennoz war ho tiegez.

Ha setu deuet an dervez ma c'hellit lavaret an eil d'egile : Ne 'z eus netra a-dreuz d'an hent. Skrivet an embannou. Eureujet oc'h. Kredi a ran o deus ho tad hag ho mamm lavaret eur ger bennak da bep hini ac'hanoc'h diwarbenn ho teverioù an eil e keñver egile, pa vezoc'h dimezet. Lod eus an deverioù-se ho peus desket en ho katikiz. Klevet ho peus sarmon diwar ar re-mañ ha diwar lod all. Marteze ho peus lennet eun dra bennak e brezonek ha n'anavezan nemet hini an Aotrou Jezegou a zo beleg ; me a zo medisin, an hevelep kenteliou a roomp, ar medisin avat en defe meur a dro kenteliou mat da rei ouspenn re eur beleg, rak gwelet am eus priedou yaouank ha na vefe ket bet a re d'ezo mont da gavout o medisin araok dimezi.

Bez ez eus traou hag a vir ober an deverioù. Remed a zo d'ezo peurliesañ. Awechou all e vefe bet gellet diskleria : ho tever a c'hellloc'h ober nemet n'ho pezo ket a vugale. Awechou all c'hoaz : bugale a c'hellloc'h kaout nemet danger a vezo evit o c'haout. Da lod all e vefe gellet diskleria : arabat d'eoc'h kaout bugale, hag a chomfe dimeze.

Eveljust ar medisin ne c'hell ket diskleria da zen ebet an traou kuz en deus gwelet. Eun dever a goustiañs eo d'an den yaouank diskleria d'egile petra a lavaras d'ezan ar medisin, n'eo ket goude beza eurejet emañ ar mare da freuza an dimezi.

Lod a lavarfe paneve o deus eun tamm mez. Ha gwir eo ivez ez eus traou hag a vezer nec'het o klask gouzout penaos komz anezo. Bezit dinec'h dirak medisin ho familh n'ez eus tra kuzeta a zo ha n'en defe gwelet, klevet pe lennet ; ha neuze, evel o kofes emeur.

Ma n'eo ket araok dimezi hepken e c'houlennoc'h kuzul digant ho medisin ; piou oar ha n'ho pezo ket diouer anezañ warlec'h.

Chans vat d'eoc'h, paotred ha merc'hed yaouank, chomit war ar maez. Dimezit mat, bezit evurus, eur gurunennad a vugale vat endro d'eoc'h. Doue ha Breiz ho paeo.

L. L.

Evit ar pezh a sell ouz "Bleun-Brug" :

Kas an arc'hant da : V. SÉITÉ, Bleun-Brug, Ty-Carré, Châteaulin, C.C.P. 544-22 Nantes — hag ar skridou da : M. l'abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).

An "dolmen" torret

EN eur c'horn eus hor Breiz ez oa teir daol-vaen miret kaer en o stad, testou eus eur sevenadur koz-koz. Endro d'ezo eur riblennad fraostaj met abred e kaved douar labourer; re ger eo an douar evit e lezel da ehana !

Epad an hañv dreist-holl e veze stank ar foeterien-vro a zeue da ober eur gwel hag eur c'hompren d'ar vein koz-se ; eun tamm gaou a veze graet ouz an drevajou, evel-just. Kasaüs e kave kement-se Yann gouer, perc'henn ar park : douar mat ha druz, dreist da lakaat paner pe winiz, douar kollet ; beskellou er park pa veze poent an arad hag ar gounidou, eus an daou du ; drevajou breset ha foeltret gant hañvidi dibalamour...

Ar berra kont a oa lakaat an taoliou-mein a dammou ha sanko an alar war o gwrizio. Pell a oa edo ar zoñj-se war e spered o troidellat met aon en devoa ! N'eo ket avat rak ar c'horriker a zeue da glask bod dindan an taoliou-mein, hervez ar c'hoñchennoù koz, ha da goroll endro d'ezo d'an hanternoz pa veze al loar en he c'hann, nann, aet e oa ar sponterezh dioutan pell a oa ha ma n'en devoa ket aon rak an dud en devoa nebeutoc'h c'hoaz rak ar spesou. Nemet, hep gouzout mat awalc'h evit petra nag evit perak e soñje d'ezañ e oa eul lastez torfed dismantra an taoliou-mein koz... Marteze en defe afer ouz ar c'houarnamant !

Setu ma tigor ar brezel ha ma teuas an enebour da vresa douar Breiz ; biskoaz kemend-all ! Ar c'houarnamant en devoa d'ar mare-ze estreget beilha war mein koz da ober hag eun dervez e voe foeltret an taoliou-mein ha lakaet an tammou anezo da zevel eur marchosi. Trouz ebet ne voe graet d'an « torfedour ».

Pa zeu bremañ diavézidi da glask an taoliou-mein d'al lec'h merket war al levrioù ne gavont nemet eur parkad bete pe ruta.



Dister a dra, a lavaro lod, gwelet « taoliou-mein » o vont tammou ; dipitus eo koulskoude. Petra a oant nemet roudou lezet gant mab-den war e hent a-dreuz ar c'hantadoù hag ar miliadoù, roudou hag a zikour skriva istor ar bed, dizelei ivez ha dangompren kudennoù ar rummadoù a-wechall. N'eo ket tra didalvez kement-se.

Ha koulskoude, ya, petra eo mein koz evidomp ? Traou maro, releger... Chapelioù koz a gouez ivez en o foull e-kreiz hor mêzioù hag a zo gwasoc'h ! Hon tud koz o deus kavet arc'hant d'o zevel ha ni ne gavomp ket zoken peadra d'o derc'hel en o zav. Eur wech kouezet an doenn, dizac'het eur penn moger, ar vein a zav buan treid d'ezo da vont d'al lec'h all. Ar chapelioù-ze a vefe bet evidomp, evit ar re a zeuio war hol lerc'h evel nevedou a wirionez hag a beoc'h.

Eur bern traou all a zo ganeomp en argoll, traou beo, stag ouz hon ene, ouz hor spered, ouz hor c'halon, traou hag a c'hellfe beza frouezusoc'h war c'hoaz eget n'int bet dec'h ma karfed en em vataat anezo, o maga, o flicha : setu peadra speredel hag arzel eur vroad tud, sevenadur disheñvel pep poblad, doareoù disheñvel pep-hini da lakaat an ene da gana ha da dridal dre zikour an arzou, sonerezh, liverezh, yez ha lennegezh, boazioù-beva ha kement 'zo.

Ha ne gav ket d'eoc'h e vefe eun torfed, diwar goust eur vroad tud, mouda eur yez, laza eur sevenadur, dizec'ha eur vammenn a varzniez hag a gaerder ? Daoust ha ne vefe ket eun torfed diwar goust an denelezh a-bez ? Lakeomp e teufe ar saozneg da veza dre ar bed ar yez nemeti implijet, nemeti desket, marteze e vefe esoc'h ober kenwerzh hag en em glevet mat na pebez distaol war dachenn ar spered ! Ha koulskoude enaomp o kerzet war an hent-se : maro ar brezoneg hirio, maro marteze ar galleg warc'hoaz diwar an hevelep abegou.

Met, ma teu eur boblad tud hec'h-unan, eus he fenn hec'h-unan da zilezel he herezh, he finvidigezioù, da drei kein d'ezo dre 'n abeg ma n'eo ket sklerijennet awalc'h he zud war o zalvoudegezh, pe dre 'n abeg ne fell ket d'an dud kemeret ar boan d'o difenn ha d'o miret ? Neuze avat eo deuet eur an argoll.

Petra 'vo pinvidigezioù Breiz warc'hoaz ? En despet da zigasted an darnvuia bez ez eus tud ha ne fell ket d'ezo e tigouezfe gant hon herezh arzel ha speredel ar pezh a zo digouezet gant an taoliou-mein lakaet a dammou. Paotred ar *Bleun-Brug* a zo eus ar re-ze. Kaer-ze lavaret, ar pezh a dremen en hon amzer a strink dioutañ fiziañ evit an amzer da zont. Marteze ec'h izelaio c'hoaz ar stal ganeomp, skourrou kras en em zistag diouz ar wezenn, dizec'het ha maro ; met war ar pengoz gwirizennet doun ha start, skourrou nevez a zav, tener c'hoaz, hag outo broñsou yaouank a darz poulzet gant nerz ar seo.

V. Favé.



Ar brasa torfetour !

N'eus ket pell, eur journal a roe da anaout edo ar Finister gant unan eus an departamantoù a ev ar muiad gwin, dre zen, e kuz-heol ar Frañs.

N'eo ket eun enor. Pell ac'hano !

Gouzout a rit pet « bistro » a-zo er Frañs ? : 500.000 ! — Ha pet aozer « lambik » ? : 3.260.000 !

Netra souezus goudeze e vefe an alkool daonet, brasa torfetour ar vro.

Klevit kentoc'h :

30 dre 100 eus an dud a varv etre 35 bloaz hag 50 vloaz a vez lazeta gant an alkool.

35 dre 100 eus darvoudou an henchou, a vez an alkool penn-kaoz d'ezo. E 1953 ez eus bet 6.000 den lazeta war an henchou ha 100.000 denn gwall-c'hlozet.

25 dre 100 eus an darvoudou labour a zo ivez diwar an alkool.

Ouspenn, 30 dre gant eus an torfejoù a vez graet en abeg d'an alkool.

E departamantoù 'zo, an hanter eus an dud klañv, a zo klañv diwar an alkool, ha ne gomzan ket eus ar re o deus gantañ kollet o skiant.

Ma ne vez ket torret e benn, hag ar c'henta 'r gwella, ouz an torfetour milliget-mañ, emañ breinet an dud gantañ ha kollet ar vro.

Met piou a dorro d'ezañ e benn ?

Tud ar c'houarnamant ? ! Re a spont o deus ne vefe ket votet evito d'ar votadeg a zeu.

E-keit ha ma ro ar c'houarnamant-se, 500.000 lur d'ar c'homite a stourm ouz an alkool, e ro 50 milion d'ober bruderezh evit ar gwin.

Pebez farserezh euzus ha diaoulek !

V. S.

C'HOARZOMP

Netra aesoc'h ?...

Kinniget eo ar pennad-mañ d'ar « Pennou bras » a zo bet e Berlin, nevez-zo, o klask en em glevout evit renka o c'hontchou (hag hor re-ni ivez, siouaz !...) hag o deus graet kazeg evel ma ouzoc'h. Eur wech n'eo ket bewech... Ha perak 'ta n'eo ket deuet an traoù ganto da vat ? Ar vojennig-mañ hen diskouezo d'eoc'h sklêr hag anat. Kontet eo bet d'in gant ma zad koz, eun den, Doue d'e bardono, hag en doa dastumet eur bern skiant diwar goust ar nesa.

En hañvez-se, a gonte d'in ma zad-koz, e rene en hor bro eur sec'hor kên spontus ma n'o doa ket sonj zoken tud koz ar barrez da veza gwelet morse gwalenn ken kriz. Klevet e vezent o lavarout an eil d'egile : « Biskoaz kemend-all ! » dres evel ma lavar Gwillou-Vihan da Chakez-Kroc'hen (pe vice-versa...) Int, avat, n'eo ket c'hoant farsellat eo o doa... Nan ! Ken gwas sec'hor ne oa bet gwelet biskoaz e Breiz. Paotred paour ! Sec'h-korn e oa ar peuri en parkeier hag aet e oa ar chatal ken treut hag an Ankou. Ken kaledet e oa an douar ma veze gwelet ar gozed o vale war e c'horre hag oc'h en em zrailha gant an naonegez !

O veza ma ne zeue gwellaenn ebet, e c'halvas an Aotrou Maer e guzulierien, eur sulvez, ha pa voent bodet holl en Ti-kêr, goude beza evel eur banne e ti Saik ar Bureo-butun, e komzas outo evelhen :

« En abeg d'ar sec'hor eo am eus ho kalvet amañ hirio. Poent eo gwelout petra vije ar gwella da ober evit stourm ouz eun darvoud ken kriz ».

Yann-Vihan, hag a veze atao fregant e deod, a savas ar c'henta :

— D'am meno, emezañ, ne vije netra gwelloc'h eget eur mell barrad glao ». An holl a strakas o daouarn.

— Netra suroc'h, a lavaras Per ar Puñs Sec'h, nemet diaesoc'h eo gouzout penaos hen lakaat da goueza !

— Diaesoc'h ? eme neuze an Aotrou Adjoint, er c'hontrol ! Klevet am eus bet atao o lavarout ne oa netra aesoc'h : n'eus ken nemet en em glevout hag hor bezo glao !

Brudet e oa an eil-vaer da veza eun den komprenet mat, ha fiziañs o doa ennañ e holl gamaladed. Abalamour da-ze ne voe kavet hini diskredik ebet en o zouez. Holl e choment mut, koulskoude.

— Mat ! eme an Aotrou Maer, benn-ar-fin, mat ! N'eus ken nemet en em glevet, neuze, hag hor bezo glao !

— Ya ! Ya ! a lavaras ar re all holl asamblez, kavet o zeod ganto en-dro, gwti-bunan... En em glevomp hag hor bezo glao !

Setu ma voe gwelet neuze, evit ar wech kenta moarvat, ar re « wenn » hag ar re « ru » unanet a-grenn evit lakaat fin d'ar sec'hor.

— Alo, mat ! eme an Aotrou Maer, pe zeiz e vo ar gwella d'eomp da gaout glao ?

— Ar c'henta 'r gwella, evel just, eme Ber ar Gêr-Uhel a oa kras e buñs abaque pell-zo.

— Lakomp neuze warc'hoaz ! a lavaras unan bennak.

— Warc'hoaz ? Warc'hoaz ? a ziroc'has Yeun an Ti-All. Ar wreg, du-mañ, a zo e sonj ober he c'houez warc'hoaz !...

— Mat ! Mat ! eme an Aotrou Maer, lakomp dimeurz !

— Dimeurz me zo o trouc'ha ma foenn eme Yann Breset.

— Ha dimerc'her me zo o kerc'hat va hini d'ar gêr, a lavaras Saik an Traoù.

— Lakomp neuze diriaou, eme adarre an Aotrou Maer.

Seblantout a raent beza holl a-du gantañ evit ar yaou pa voe gwelet Glaoda an Ti-Gwenn o sevel en e zao :

— Diriaou, emezañ, e rankan mont da foar Vervenn gant eun torrad moc'h bihan... Emic'hañs, evit eun devez muioc'h pe nebeutoc'h a sec'hor...

— Lakomp disul, neuze, eme Saik Ker-Yann hag a oa piz war e amzer, evel-se ne gollo den ebet e zavez-labour !

— Nan ! eme an Aotrou Maer, deomp bremañ d'an oferenn, rak bet eo ar son diweza. Benn disul oc'h en em vodimp adarre, ha mar gellomp en em glevout, hor bezo glao er sizun a zeu...

Kit 'ta, neuze, a lavare d'in ma zad-koz evit kloza ar gaoz, kit 'ta neuze warlerc'h an dra-ze, da glask lakaat ar broioù d'en em glevout !...

Hervez Y. DANTEC (Sant-Nouga).

Tennet eo ar pennad-mañ diwar ar Progrès hag ar C'hourrier.


Ha lenn a rit ar journal-se ?

Ma ne rit ket, n'ouzoc'h ket sur pehini eo ar journal plijusa a vez embannet bep sizun er Finister. — Skriva da : 8, rue des Gentilshommes, Quimper.


INTANVEZ GOEZEG



Eun in- tañvez eus a Oezeg deut d'o-ber al



lez Eun in- tañvez eus a Oezeg deut d'o-ber al lez, Deur pôtr



yaouank eus a Blei-ben; gweli'od d'ei paou-ez.

Eun intañvez eus a Oezeg deut d'ober al lez (bis)
D'eur pôtr yaouank eus a Bleiben; gweli'od d'ei paouez.

An intañvez he doa madou hag heñ n'en doa ket,
Ha c'hoaz ar paourkêz inosant n'he c'hemere ket.

« Ma karjec'h paourkêz den yaouank, vijec'h bet 'n hoc'h êz,
Hag ive o kônta arc'hant gant eun intañvez. »

— Petra dalvez d'eoc'h intañvez klask ma zouelli ?
Teñval bras 'kavan ho pizaj keñver ma hini.

— O ! salokras 'ta, den yaouank, diflat e komzet,
Met a-benn 'vec'h deut d'am oad-me, c'houi a vo cheñchet.

— Hogen ma soñj-me ne cheñcho ha d'eon e talc'hin,
Ken a gavin eur plac'h yaouank hag a blijo d'in.

Ken a gavin eur plac'h yaouank ha diwar ar mêz,
Nann birviken ne zimezin gant eun intañvez.

— O ! salokras 'ta, den yaouank, din-me leveret,
Pelec'h 'mañ 'r pevar c'hant skoed am boa d'eoc'h roet ?

— Ho pevar c'hant skoued, intañvez, me n'o nac'han ket,
N'eun habit hag eun inkane ez int bet lakêt.

Met ma habit a zo uzet, ma loen 'zo maro :
Roit d'in kement all intañvez, me o c'hemero.

Roit d'in kement all, intañvez, a volonte vat,
Me roy d'eoc'h eur c'houblad bouchou (1), d'ho trugarekât.

Benn disul me 'zay d'ar pardon hag hoc'h enoro,
Me roy d'eoc'h eur c'houblad bouchou 'vit hoc'h holl mado. »

Eur son goz, dastumet gant YEUN AR GO,
hag a veze kanet, n'eus ket pell c'hoaz e
Bleiben hag e Goezeg.

(1) Bouchou = pokou.

Penaos e varvas an Ao. Schmitt evit savetei

Martoloded e lestr

Soudarded ha dreist holl moraerien ar brezel 1939 n'o deus ket ankou-nac'het ar gwall-zarvoud a skoas listri-brezel an Amerikaned e Pearl-Harbour d'ar sul 7 a viz Kerzu 1941.

Emaoun o vont da zisplega d'eoc'h penaos e varvas, en eur rei e yuhez evit ar re-all, eur beleg yaouank, war eul lestr taget gant bombezennou ar Japaniz.

Aloisius-Hermann Schmitt a oa aluzener war an *Oklohama*, eul lestr brezel unan eus ar re gaera a gaved en Amerika.

Pa zigouezas an aerlistri japoniad a-us da Bearn-Harbour, nadoziou an horolajou a ziskoueze 7 eur 55 diouz ar beure. Edo an aotrou Schmitt en e gambrig, oc'h en em bouchas da vont d'ar chapel da oferenna. Kemer a reas e vreviel hag hen lakeas e godell e boriant. En eun taol trum, eur yudadenn skiltrus a freuzas an aer, ha bombezennou da goueza war ar porz-mor. An *Oklohama* a gren eus an eil penn d'egile. Gloazet eo bet al lestr. Kambrig an aotrou Schmitt a oa war an tu sribourz, eur prenestrig krenn, o rei d'ezhi sklaerder an deiz. Al lestr a stou war an tu babourz. An holl draou a oa bet laketa war an daol-skriva a gouez diwarni. An aluzener a wel e brenestrig o vont goustad goustad war-zu an neñv.

D'an ampoent, martoloded a zeu e-barz hag a lavar d'ar beleg edo al lestr o trei war e c'henou.

Bez e oant o klask savetei o buhez en eur dremen dre brenestrig ar gambr.

Pedi a reont an aluzener da dremen da genta, met hen a nac'has ober evelse hag a c'hourc'hemennas d'ar baotred mont prim er-maez. Klevout a raed trouz an tarzadennou er porz hag ive trouz an traou o koueza e diabarz al lestr.

Endra ma tremene ar vartoloded dre ar prenestrig, al lestr a zalc'he da drei. An traou kouezet diwar an daol a risklas war-du ar speurenn a oa en tu eneb, ar speurenn-mañ a grogas da vont a-blaen, ha prestik goude, deut e oa da veza al leur. Ar prenestrig, neuze, a oa en nec'h.

Treid an diweza martolod a steuzias. An aotrou Schmitt, d'e dro, oc'h en em harpa ouz an daol stouet spontus hogen staget c'hoaz ouz ar planchod a dizas ar prenestrig. Ar baotred a oa er-maez a grogas en e ziovrec'h hag en e ziouskoaz hag i da zacha warnañ. Poan gollet. N'helle ket tremen, ar paour-kéz den. Bez e oa eun dra bennag hag a oa oc'h enebi outañ. Petra ?

« Va breviell eo, a lavaras trum an aluzener. Ret eo d'in diskenn em c'hambr. »

Diskenn a reas buan hag e tennas al levr eus e c'hodell. Daoust d'an trouz a oa graet er-maez, ar beleg a glevas tud o krial dindanañ, da lavarout eo en trepas a oa o heda e gambr. Sevel a reas an nor deut breman da veza evel eur trap, dindan e dreid. Ar vartoloded a bignas er gambr gant poan. Schmitt a lavaras d'ezo mont er-maez dre ar prenestrig. Int-i, ive, a fellas d'ezo e tremenfe da genta; hogen ne asantas ket. Al lestr a zalc'he da drei, hag ar prenestrig a groge da dremen d'an tu-all, evel eur steredenn o vont gant e hent. Tud an eil strollad a zeuas er-maez, tiz ganto. Martoloded all a zeuas er gambr c'hoaz hag int-i ive a bedas an aluzener da dremen. Schmitt, eur wech ouspenn ne fellas ket d'ezañ. Klevout a raed atao trouz an tarzadennou.

Bec'h o doa an dud o tenna o alan er gaoued-se war-nes trei war e genou. Daou zen hepken a chome er gambr gant ar beleg. Unan a zeuas er-maez. An hini diweza a zelle ouz Schmitt. Ar beleg a lavaras d'ezañ kaout fiziañs : amzer en defe da vont er-maez.

N'hellent ket gwelout dremmou an dud a oa er-maez, hogen klevout a raent o mouezioù. Ar vartoloded a c'halve a bouez-penn. Ar paotr diweza a dremenas. Schmitt a welas e ziohar o steuzia hag a glevas e dreid o steki ouz houarn ar c'houc'h.

Klevout a reas ive garmou an dud a oa er-maez hag o doa paket anezañ dre o diouvrec'h.

Ar beleg a lakaas e zaouarn war vord ar prenestrig hag a dostaas e zremm outi. Edo an dour o vont da steki ouz genou ar prenestre-se, Schmitt a welas eta dremm ar mor hag eun tamm eus an oabl glas, magedennou du o sevel ennañ.

Al lestr a reas c'hoaz eun hejadenn. Ne voe ken na mor nag oabl, n'etra nemet eul lamm-dour spontus a voutas ar beleg war adreñv, en diabarz beuzet.

(*Tennet diwar al levr « Le survivant du Pacifique » gant Georges Blond, Fayard, Paris, 1949.*)

(Lakaet e brezoneg gant **Ronan Kervene.**)

KORN AL LIZIRI

Divroerez.

« Feuket bras oun bet, er bloaz tremenet, o lenn war ar c'helaouennou en doa kre-det unan, e bodadegou studi ar B.B. lavarout ha displega ne oa ket mat, evit rei labour d'ar Vretoned yaouank o sevel niverus, klask sevel uzinou e Breiz. »

Pep hini, koulskoude, a oar ervat petra eo bet, evit ar Vretoned a hiniennou pe a dolpadou, an divrodeg padus e Bro-C'hall : eun eien a reuz a bep seurt. Ar mic'h-riou gwasa ar re lousa ha kaleta, hag alies, siouaz ! an euzusa, a zo bet o lodenn, koulz lavaret dre ret. Pe e vijent aet da labourat ha da chom er c'heriou pe war ar-mezioù, d'an nebeuta 80 dre gant eus ar Vretoned divroet a zo kollet evit Breiz hag evit ar relijion. Ha kenderc'het a raio an traou evel-se ma ne vez ket kavet labour d'ar Vretoned e Breiz, da skouer, en eur sevel uzinou.

Neuze an dud a chomfe da labourat en o bro, rak an darn vrasa eus ar vreiziz a gar o bro, hag a gar chom da labourat enni : ar gargidi breizad, da skouer, a zo holl o klask dont da labourat e Breiz, pe da vihana, tostaat outi. Tost, an holl dud a zo bet ret d'ezo mont kuit evit goude o buhez, a zo aet kuit gant keuz. Penaos eta ne vefe ket klasket sevel stalioù labour e Breiz ? Daoust ha n'eus ket eur c'hrenn-lavar anavezet gant ar vreiziz, o lavaret : « an neb a venn, hennez a c'hall ». »

Penaos ober ? Da genta, lakaat bruda e-touez an holl, ar re yaouank dreist-holl, ar menoz eo ret hag eo posubl sevel uzinou e Breiz evit ar Vretoned... Sevel eur genstrivadeg prezegennoù evit ar re yaouank war an danvez-se, gant prizioù bras : 20.000 lur ! Ar prezegennoù-se a vefe barnet er Bleun-Brug, pe dindan paeroniezh ar B.B... Ma kavit ar menoz-se mat oun prest da ginnig 25.000 lur evit e seveni. »

H. M. Ijinour.

D'hon lennerien a zo eus ar vicher, da lavarout ar pezh a sonfont eus kement-se. Prest omp da voula amañ o respontou.

« La Session du Bleun-Brug, le 28 Mars, à Vannes, m'a beaucoup intéressé et enrichi. »

J'en suis revenu, avec entr'autres trésors, un exemplaire du « Breton par l'image » et depuis nous « bretonnons » un peu, moi, et trois de mes élèves qui ont toujours ignoré leur langue maternelle (deux de Belle-Ile-en-Mer, et un de Saint-Pol-de-Léon). Je ne leur ai pas demandé leur avis, mais il le font avec un plaisir évident...

Depuis l'installation de mon école en Ile-et-Vilaine, il y a toujours des Bretons parmi nos élèves ; un seul parlait le breton couramment, mais beaucoup désirent l'apprendre. »

M. B., Ecole du Gai Savoir.

AL LABOUR-DOUAR E BREIZ

abaoue hanter-kant vloaz

gant an Ao. de Guebriant

An den diwar ar-mêz.

Greomp ivez eur sell war Yann Gouer. E zouarou hag e vinviachou a zo aet war-raok ; hag heñ ?

Ne vez ket kalz a veuleudi diwar e benn gant ar skrivagnerien goz a Vro-C'hall deuet da bourmen e Breiz. Da gredi eo, avat, n'eus ket da deurel kement-se a gont ouz o skridou.

Ar gwaz, hag ivez ar vaouez, a zo aet war-raok kalz abaoe an amzer gent. Deskadurez a zo deuet d'ezo, beaji o deus graet, ha n'eus mui koulz lavaret tamm kemm ebet etrezo ha tud ar c'hêriou. O dilhajoù o deus cheñchet ivez ha dre-se Breiz he deus kollet eun tamm brao eus he c'haerder, siouaz !

Koll an dilhad avat, n'eo ket ken gwas ha koll ar yez. Amañ n'eo ket kaerder ar vro eo a goller, met pinvidigez ar spered ar pezh a zo eur gwall dra. Gouzout galleg a zo mat, a zo ret ; perak avat dilezel ar brezoneg ? Perak e nac'h ar vamm deski he yez d'he bugale ? Na pegen meulius e vefe labour ar Bleun-Brug mar gellfe dont a-benn da virout ouz ar pleg-mañtrus-mañ da vouga ar brezoneg.

E lojamant.

Amañ, ret eo hen anzañ, n'eo ket aet kement war-raok. Ne weler mui, a drugare Doue, an tiez fall bet gwelet gant « Young » : koz lochennoù hep gwer ha kazi hep sklerijenn.

Ret eo lavarout koulskoude e kaver lojamantoù modern war aodou ar C'hotas-du-Nord hag ar Finister, hag ivez wardro Kastellin, Kemper, Bannaleg, Kemperle...

Re alies, avat, e kaver el lec'h all, al leur-zi e douar breset, awêchoù gant toennoù soul ha mogerioù pri.

An tiez e Breiz a zo e mein galet hag a harp ouz an amzer hag ouz ar c'hantvejoù. Pa ne gouezont ket, e virer anezo evel m'edont bremañ 'z eus meur a gantved, gant doriou ha prenestroù re vihan, ha solieroù re izel, re nebeut a er hag a sklerijenn enno.

Ret eo alia ha sikour ar c'houer da sevel tiez muioù modern, hervez patrom an tiez koz, enno pep tra o klota gant an amzer bremañ : elektrisite, tommerez, dour red, kegin modern... ha pep tra e sell ouz ar yec'hed. « Office Central » Landerne a ra skol hag a ra sikour war ar poent-se.

N'eo ket an ti hepken a dle beza modern, met ivez al lojamantoù all stag outañ. Evit-se ret e vo presta arc'hant d'ar c'houer.

War 250.000 ferm a zo Breiz ar bevar anezo hep ken a zo mat. Ar re-all a zo da sevel endro pe da gempenn.

Yaouankizou kristen ar mêzioù

E Kemper, d'an 9 a viz Mae, e vo eur gouel bras, en enor d'al labour-douar, gant paotred ha merc'hed an Y.K.A.M. (J.A.C.) evit lida 25 bloavezh o emzao.

Holl yaouankizou an eskopti, diwar ar mêz, en em gavo en deiz-se e Kemper, en-dro d'o renerien.

BUHEZ AR BLEUN-BRUG

Hon abadenn-studi e Gwened.

D'ar 28 a viz C'hovevrer hon eus bet hon devez-studi e skol Sant-Fransez-Xavier e Gwened.

Savet eo bet an devez-se, war c'houlenñ renerien katolik ar c'helc'hiou keltiek, c'hoant d'ezo da rei d'o strolladoù eun dra bennak muioù eget dañsal ha kana.

Ouspenn kant a yaouankizou eus pep korn a Vreiz a heulias hor c'haozeadennou ; kalz muioù eget n'hon dije kredet. Eur seblant mat eo ha diskouez a ra eur wech ouspenn ar sec'hed o deus hon tud yaouank da veza kelennet war draoù Breiz. Eur wech muioù en deus ivez ar Bleun-Brug graet labour efedus. « J'en ai appris plus à Vannes en une journée, qu'un peu partout, en trois ans de cercle » a skriv d'eomp eur mignon. « Tout fut tellement bien réussi... Nous n'attendons plus qu'une chose maintenant, c'est la prochaine session... »

Evit ar re a erruas da sadorn, e voe eur veilhadenn goude koan.

Maodez Glandour a gomzas d'eomp eus ar sonerez breizek, ha Gaby Ledan eus Kiberen a roas da glevout kanaouennoù iliz dastumet gantañ e-barz Inizi Sun hag Hoedig. Fromus e vez atao klevet evelse pobladoù tud a-bez o kana a greiz kalon.

D'ar sul yntin an holl en em gavas bodet e chapel ar skol evit an ofereñ lavaret gant an ao. ar Bihan ha displeget gant an ao. Floc'h. An ao. chaloni-meur Baron, vikel vras Gwened, a reas eur brezegenn.

Goude beza asuret d'eomp bennoz an ao. n Eskob e komzas eus ar pezh a reas Doue evit Breiz, hag eus ar pezh a c'hortoz Doue digant ar Vretoned, en dizro eus e vadelez.

« C'houi eo, tud yaouank, emezañ, bleunioù hor Breiz. Er vro hag er-maez ar vro, dalc'hit soñj emañ daoulagad ar bobl o para warnoc'h. Diwallit mat na ve barnet fall hor Breiz gant ar dud a sell ouzoc'h. Bezit skouerioù bepred direbech... »

Da 10 eur an ao. Gab ar Moal, rener meur ar Bleun-Brug a zigor ar gaozeadenn genta en eur brezanti ar prezeger, an ao. ar Bihan.

Lavarout a ra d'eomp ar prezeger, an darempredou a c'hell pe a dle beza etre ar strolladoù folklored hag an Iliz. Diazezet eo e lavarioù war gomzoù hon Tad Santel ar Pab ; dalc'hel da spered ha da c'hizioù mat eur vro a zo ober labour kristen. Ar c'helc'hiou a c'hell beza eun dachenn a abostolerez hag a binvidigez ene. Chom mouzet dirazo ne vefe ket eun dra fur.

An doktor Philipp, eus Treboul, a gomzas goude eus doareoù-ene ar yaouankizou eus 17 vloaz da 25 bloaz. Gant kalz a ampartiz e tisplegas dirazomp ene ar paotr hag ene ar plac'h gant an holl blegoù mat ha fall a gaver enno. Kement den a fell d'ezañ ren strolladoù re yaouank, a reñk gouzout kement-se, mar fell d'ezañ ober labour vat. Risklus e vez alies meska paotred ha plac'hed yaouank. Met gant eur penn-rener fur hag ampart, ar riskl a c'hell trei da vad pep hini, ha digeri an hent da zimezioù hag a vo tiegeziou eürus. Gwelloc'h a-dra-sur, d'ar re yaouank en em zarempredi evelhen, evit en em anaout gwelloc'h, kentoc'h eget e dizurz ar salioù dañs, e-kreiz an noz.

Eur pred laouen a voe servichet d'eomp da greisteiz. Gwenediz, dreist-holl, a ouezas kas en-dro ar c'han ; netra souezus, p'edo eno an ao. Derian, Job Jaffre ha Jud ar Paboul.

Da 13 eur 30 e krogas endro an abadennou. An ao. Floc'h eo a zigoras gant eur brezegenn da ziskouez penaos emañ an emzao breizek a-vremañ o klota gant ar bed o trei. Lavarout a reas e komze en e ano e-unan ha nann en ano ar Bleun-Brug. Gantañ a rejomp tro ar c'hantvejoù ha tro ar bed, o tenna sklerijenn eus daryoudoù brasa an istor evit amzer bremañ hor Breiz.

Tan a oa e komzou ar prezeger ha meur a hini eus ar selaouerien a voe skoet gantañ.

An ao. Duigou penn-skrivanier er « C'hourrier » hag er « Progrès », eo a gomzas da ziweza, gant eur ouiziegezh anat d'an holl.

Ar vuhez folklorek, emezañ, a dle beza buhez an amzer vremañ; anez da-se n'eo ket buhez eo. He c'havout a dleomp e pep parrez, e pep karter hag e-doug ar bloaz penn-da-benn. Graet eo ar vuhez vreizsek-se, evidomp da genta ha nann evit an douristed. En em astenn a dle war gement tra hon eus ha war gement tra a reomp.

Ar c'helc'hiou a dle beza gwirion ha leal. Arabat d'ezo beza hepken persou-nachou evit ar c'hoariva. Kredi o deus eur gefridi da seveni : ad-rei d'ar bobl istim ha karantez eviti he-unan hag evit ar pezh a zo d'ezi : herez-sakr he zadou.

Heñ a ra d'ar Bleun-Brug kaout ivez eur c'hannadig gouest da veza intentet gant ar Vretoned niverusoc'h niverusa, siouaz ! ha ne lennont mui ar brezoneg dre ma n'int ket gouest.

« Evit lakaat an tan da gregi en eteo bras m'eo ar yez, eme an ao. Duigou, e ranker lakaat keuneud bihan dindan. »

Goude pep kaozeadenn pep hini a c'hellas lavaret e soñj. Frouezus kenañ e vez atao, eskemma ar menozioù.

War-dro 17 eur e voe echu gant ar prezegennou, met pell e chomas c'hoaz ar re yaouank d'ober anaoudegezh an eil gant egile.

Arak kimiada e voe divizet e vije eun devez a vignoniezh etre ar c'helc'hiou en eul lec'h dibabet, el lec'h ma teufent, n'eo ket evit sevel war eur podium, met evit en em anaout ha tremen a-gevret eun devez yac'h ha laouen.

Visant Seite.

G. S. — Emaomp o roneoskriva prezegennou abadenn-studi Gwened. Evit o c'haout, ne vo nemet skriva d'eomp : Permanence Bleun-Brug, Châteaulin, Finistère. Ho pedi a reomp da gas d'eomp ar priz a vo skrivet warno pa resevoc'h anezo.

Klevit 'ta !

Digas a reomp da soñj da izili ar Bleun-Brug e resevomp gant anaoudegezh vat skodennoù-ezel ar bloaz 1954 : Skoazeller : 200 lur. Ezel : 500 lur. Ezel madobour : 1.000 lur. — V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finistère. C.C.P. 544.22 Nantes. Met diwallit, skodenn ha koutmanant n'eo ket ar memes tra. N'ankounac'hait ket lakaat evit petra e kasit aro'hant.

Skodennoù 1954 ha profou (Kendalc'h) eil rollad.

Chaloni Coadou : 500 lur ; — Tad Cadiou : 300 l. ; — Dim^e Chevillotte : 600 l. ; — Ao. Gembrie : 1.000 l. ; — Ao. Even : 1.500 l. ; — M. R. Leseine : 500 l. ; — R. Toupin : 200 l. ; — Ao. Radenac : 500 l. ; — Job Kergrist : 500 l. ; — Ao. P. Mocaer : 1.000 l. ; — Ao. Mahé : 1.000 l. ; — Y. Le Chopelier : 500 l. ; — Ao. Guennégan, beleg : 500 l. ; — Dr Philippe : 2.000 l. ; — G. Pigeon : 500 l. ; — Ao. Morvan, noter : 1.500 l. ; — Ao. beleg Calvez : 500 l. ; — Dr Regnault : 1.500 l. ; — Ao. Guillermou, beleg : 500 l. ; — Ao. Bussou : 500 l. ; — Ao. Croguennec, beleg : 500 l. ; — Ao. hag Itr. Guicher : 2.000 l. ; — Ao. Abgrall : 200 l. ; — Yvon Troal : 500 l. ; — Ao. Colleau : 1.000 l. ; — Dr Tricoire : 1.000 l. ; — Kor. Riou : 100 l. ; — Ao. Badoal : 500 l. ; — J. Abarnou : 100 l. ; — J. Jézéquel, beleg : 100 l. ; — Ao. Kerhoas : 100 l. ; — L. Bolorel : 100 l. ; — Ao. Richer : 500 l. ; — Ao. Seifé, beleg : 500 l. ; — Dr Rousseau : 100 l. ; — Tad Quinquis : 100 l. ; — Itr. Falc'hun : 100 l. ; — Ao. Kerdilès, beleg : 200 l. ; — Ao. Acquitter, beleg : 100 l. ; — Ao. Creignou, beleg : 100 l. ; — Ao. Mary, beleg : 100 l. ; — Ao. L'Haidon : 100 l. ; — Ao. Queffelec, beleg : 100 l. ; — Ao. Guivarc'h, beleg : 100 l. ; — Dr Guezennec : 100 l. ; — Ao. Guillerm : 100 l. ; — Ao. Mahé : 500 l. ; — Ao. Erw. de Parcevaux : 500 l. ; — Tad Pronost : 100 l. ; — Ao. Boulzeu, beleg : 500 l. ; — Ao. Queinnec : 100 l. ; — Ao. Guernic : 100 l. ; — Dr Colonne : 500 l. ; — Ao. Cogutic, beleg : 100 l. ; — Dr Delaporte : 500 l. ; — Ao. Philippot, beleg : 100 l. ; — Dr Giffo : 100 l. ; — D^{lle} Abguillem : 200 l. ; — Chaloni Mear : 100 l. ; — Itr. Pennec : 100 l. ; — Dr Ezel : 500 l. ; — Dr Creignou : 100 l. ; — Itr. Coz : 100 l. ; — Y. Goas : 100 l. ; — Sr Eulalie : 100 l. ; — Ao. Robert, beleg : 500 l. ; — Ao. Dyèvre : 100 l. ; — Ao. Falc'hun, beleg : 100 l. ; — D^{lle} Pouliquen : 100 l. ; — Ao. Bleunven, beleg : 500 l.

K E I L E I E R

C'hoariva.

E Sizun o deus nevez roet e brezoneg « Ar Sant Nevez », pezh c'hoari savet gant an Ao. Perrot. Rei a raint dizalle « an nozvezliad reo gwenn » ma kavont ar skrid anezañ en eun tu bennak. Piou a c'hellfe kas d'ezo ar pezh-se, pe lavaret d'ezo e pelec'h e gavout. Skriva da : Ch. Brissou, Ecole St-Illud, Sizun.

Abadennoù a Levenez.

Eun tamm bennak a vrezoneg a gaver atao en abadennoù-mañ, anvet e galleg « Coupe de la Joie ».

Ar pezh a zo d'ober eo rei da gredi d'ar re yaouank int kalz barrekoc'h pa ganont ha dreist holl pa zisplegont e brezoneg.

Bleun-Brug Bro-Dreger.

Mont a ra-Tregeriz endro m'eo eun dudl. Graet o deus tro ar skolioù ha kavet digemer mat dre holl. Bugale a vo o kenstriva a-vernioù, e Bleun-Brug Pleuvihan, d'an 30 aviz Mae.

Bleun-Brug Pleuvihan a vo en enor da Sant-Vodez a zouaras eno 15 kant vloaz a zo.

Bleun-Brug Bro-Leon.

Lokournan-Leon a zo ivez a zevri-kaer o pourceas Bleun-Brug Leon. An Doktor Dujardin a fell d'ezañ ober gwelloc'h eget Plougerne daou vloaz a zo.

Graet e vo ar Bleun-Brug-mañ en enor da Sant Herve, paeron ar ganerien hag ar varzed.

Emañ V. Seite oc'h ober tro skolioù Leon, gant magnetofon an Ao. Yeun ar Gô (mil trugarez d'ezañ) evit ma vo e Lokournan kement a vugale o kenstriva hag e Pleuvihan. Digemer vat a gav dre holl.

Leoniz avat o deus da zivall na vent trec'het en dro-mañ gant Tregeriz.

Lazou-kana (chorales).

Al lazou-kana o deus c'hoant kemer perzh e kenstrivadegoù ar Bleun-Brug e Gwened, a c'hell gouenn ar c'hanaouennoù kendoniet, digant ar sekretour, Bleun-Brug, Kastellin. Lavaret e peseurt mouez e kenstriver : 4 mouez A (an hini diêsa) — 4 mouez B — 3 mouez disheñvel — 3 mouez ingal. — Kaset ez eus bet eur skouerenn eus pep kanaouenn d'al lazou-kana a anavezomp. Ho pedi a reomp da respount d'eomp ar c'henta 'r gwella. Eur skoed e koust ar folleun-gan.

Kelc'hiou nevez.

Kelc'hiou keltiek nevez a zo bet savet, en Uhelgoad hag e Brasparz, gant ar skolacrien, e Kleder gant ar patro. E Landerne emeur ivez o lakaat eur bagad sonerien war-sao.

Ar brezonek er skol.

An F.C.B. en deus prenet d'eomp evit 175.000 luriad a levrioù skol vrezonek : 500 « Yez hon Tadou » digant ar B.A.L.B. hor boa dija meneget, ha 500 « Le breton par l'Image » digant Moulerez Leon. Keit ha ma padint, ar skolioù a c'hell gouenn levrioù diganeomp evit netra.

Kaset hon eus levrioù « Le Breton par l'Image » : 200 levr da Bleun-Brug Pleuvihan — 30 da Vuhulien — 10 da Gemper-Gwezenneg — 10 da Bloezal — 20 da Bloubazlaneg — 10 da Blounez — 10 da Bempoul — 4 da Vourbriag — 10 da skolaj Gwengamp — 10 da Blouezeg — 20 da St-Vaze Kemper.

« Yez hon Tadou » a zo bet kaset : 20 da Vourbriag — 20 d'ar Falz, Brest — 5 da Blouezeg — 6 da Vegart.

Kenstrivadeg an F. C. B.

E miz Gouere a zeu, da geñver gouelioù bras Kerne, e Kemper, an « Emgleo evit ar Brezoneg » (F.C.B.) a roe eur priz a 10.000 lur da oberour ar gwella skrid diembann, e brezoneg, a vezo bet kaset d'ar varnerien : Marvailh, pezh-c'hoari, barzoneg...

Kas ar skridoù da : Bleun-Brug, Châteauin (Finistère), araok ar c'henta a viz Mezeven.

Evit kaout sklerijenn war ar genstrivadeg, e c'heller skriva da : B. P. 17, Bréost.

Imachou.

Evit kaout imachou bihan war ar Were'hez, skrivet warno e brezoneg, skrivit da : Marie-J. Moulin, 22, rue Gervand, Rennes. C.C.P. 431 Rennes. — Gwerzet e vezont 187 lur ar pakad a 25.

Nevez deuet er bed.

Gwenola-Youna Montjarret eus Sant-Brieg, he deus kemennet d'eomp ganedigez he c'hoar vihan, badezet dindan an ano a Nolwenn-Anna.

Gourc'hemennou d'ar gerent, ha yec'hed d'ar verc'hig gant bennoz Doue.

« Stage folklorique ».

Yaouankizou an diou skol normal eus Sant-Brieg, o deus nevez bet eur « Stage folklorique » en deus padet meur a zevez. Pa vezint mistri ha mestrezed-skol setu aze paotred ha merc'hed hag a vo gouest da sevel pe da ren kelc'hioù-keltiek. Petra reer evit-se war dachenn ar skolaioù kristen ?

Filmou war an ao. Perrot.

Ar filmou war an Ao. Perrot hon eus bet meneget er miz tremen, pa skrivemp diwarbenn prezegenn H. Caouissin e Kervreiz, a zo bet savet gant an Ao. Galbrun, eus Vincennes.

Enor da Visant Seite

sekretour bras ar Bleun-Brug ha d'ar Brezoneg

Ar Frer Visant Seite a zo bet laket war roll ofiserien an Akademi. Setu eur c'helou hag a laouenaio e vignoned, ha mignoned ar brezoneg.

Visant da genta. Kement en deus poaniet da sevel leorioù skol : « *Me a zesk brezoneg* » gant skoazell an ao. Ugen, « *Yez hon Tadou* », gant skoazell an ao. Stephan, ha « *Le Breton par l'image* » ; hag ivez eur « *Skol vrezoneg dre lizer* », heuliet gant eun tamm brao a Vretoned abaoe 1945 ; ouspenn, poaniet en deus da rei d'ar *Bleun-Brug* eul lufr hag a ra bremañ tro ar bed. Mat en deus graet eta Gouarnamant Bro-C'hall diskouez evel-se talvoudegezh e oberou hag o deus o flas war dachenn an « Education Nationale ».

Emañ hirio ar brezoneg digoret d'ezañ dor ar skolioù, ha draf an ekzaminou ivez. Goude labour hor Mignon, n'heller ket abegi bremañ n'eus ket a levrioù skol. Laouenoc'h e vije bet, a dra sur, ma ne vije ket kement a skolioù kristen oc'h ober skouarn vouzar ouz yez hon Tadou.

Ar vrezonegerien a zo er joa ivez, rak an enor a gouez war Visant a gouez ivez warno. N'o deus ket stourmet en aner.

Diwar lein an Neñvou el lec'h m'emañ hirio, Yann-Vari Perrot a c'houlenn digant Sent ha Sentezed Breiz, skuilh war Visant grasou puilh, ar re m'en deus ar muia ezomm anezo da gas da benn an ero bouc'het e Sant-Nouga hanterkant vloaz a zo. Hag an holl Vretoned a gemero fiziañs en amzer da zont Breiz hag ar brezoneg.

L. Lok,

Renner koz ar Bleun-Brug.

ARADEG

Du-mañ, emañ ar c'hiz pa vez labour kalet
D'en em zikour bepred evel bredeur karet.

D'al lun diouz ar mintin, kerkent ha goulou deiz,
E park ar waremm vras ez eus gwazed e-leiz.
Eno emañ Paol Vras, ar Floc'h ha per an Du,
Maodéz ha Yann ar Maout, prest da gregi dioustu.
Paol a grog en alar, ha kas a ra da benn
E yommou flour ingal hag eün evel eun tenn.
Koulz arer ha Paol Vras a ve diés da gaout :
En holl aradegoù ez a gantañ ar maout.
Ar souc'heller a zo etre daouarn ar Floc'h ;
Ken kreñv eo e zivrec'h ma oar brao bras e loc'h.
Bleinet eo an diou jeo gant daou grennard seder,
Distagellet o zeod ha skañv o divesker.
Dalc'hmat a-hed an deiz e sklak o skourjez lér ;
Sentus ouz o mouezioù, ar c'hezeg a lak herr.
Mort eo ar sugellou, sutal a ra ar souc'h ;
Klevit saig ar C'hastell pegen nerzus e youc'h ;
E urzioù, krak ha berr, a glever eus a bell :
« Dic'ha 'ta Morian, Sô Penngwenn ! Hei 'ta Yell !... »
Hag ar skourjez en êr, a nij, a sùt, a sklak ;
Dindan nerz ar c'hezeg, ar souc'heller a strak.
Dibrada 'ra douar, ken founnus, war e gein,
Ma skrij divrec'h ar Floc'h pa dremen war ar vein.
Pa vez e penn ar park, dijolo e skouarn,
E weler o lintra, kroc'hen flour an houarn.

An alar kempennik, a ruz dindan ar bomm.
An diou gazeg outañ a zo renet gant Lomm.
Ken ingal e sachont, ken reiz ez eont d'ar paz,
Ma 'z eus lorc'h e Lommig ha fouge e Paol Vras.
Kroc'henenn an douar, evel eur seizenn zu,
Dibradet gant ar souc'h a gouez en eur chench tu,
E goueled ar foz down, warlerc'h ar souc'heller,
Flouret d'ézi he c'hein gant pok an distroñser.

Dispar eo an amzer ha laquen ar wazed ;
Sec'hi a ra buan an douar nevez aret,
Skrabet penn-da-benn gant pep seurt laboused ;
Marellet eo ganto an douar labouret.
Mont ha dont a reont, skrabat en eur wikal,
Pigosat ar buzug, lammat ha gournijal.

Dreist ar park e tremen bandennadou tridi ;
 En o mesk, o koagal, e klever ar brini.
 Pa vo hadet ar park e vezint bagadoù
 A-hed an irvi fresk o skrabat an hadou.
 Evit mirout e c'hreun warlerc'h an haderez
 E ranko ar c'houer beza mat war evez.

Gwall domm eo d'ar c'hezeg ; warno an eonenn
 A red dindan ar stern, penn-da-benn d'o c'hroc'hen.
 Dre ma sachont ingal c'houezet o fronellou,
 E wigourr ar wakol, al lâr, ar sugellou.
 O faoiou houarnet a grap en douar noaz
 Ken eo plat gant ar bec'h ar wakol war o skoaz,
 « Bec'h atao, Rouanez ! Hei da benn 'ta Lusi ! »
 An traou a ya en-dro ken brao, m'eo eun dudi.
 Maodez ha Yann ar Maout, war gorf o rochedou,
 O deus c'hoari awalc'h o palat ar pennou.
 Ouz an daou du d'ar park, ar gwagou douar fresk
 Dre m'ac'h astenn an deiz a ya buan war gresk,
 Evel tonnou ar mor o c'hounit a lammou,
 Dre ma sav an dour glas, trêzenn wenn an aochou.

Pell araok ma sono anjelus ar serr-noz,
 E park ar waremm vras al labour a vo kloz.

Laouenanig Breiz.




UN ARZOUR BRETON :

PER NEDELEC

Ederou miz Meurz diweza em eus bet an eurvad hag ar blijadur d'ober anaou-
 degez gant eun arzour eus an dibab, hor c'henvroad *Per Nedelec*, eus
 bourc'h Ploneour-Lanvern, eur yontr d'an ao. beleg Per-Yann Nedelec,
 sekretour an Aotrou 'n Eskop.

Eun den seven hag hegarat eo Per Nedelec, yac'h ha birvidik c'hoaz evel
 eur paotr yaouank, daoust d'e bevarzek vloaz ha tri-ugent echu. Betek an oad
 a c'houec'h vloaz hag hanter-kant, pe war-dro, eo bet o terc'hel e diegez e
 Keryahu ha bremañ emañ o lakaat da dalvezout ar jardinou bras ha kaer en
 deus e bourc'h Ploneour. N'eus ket par d'ezañ da zével frouez-mir eus ar brava
 hag ar gwella, avalou ha per dreist-holl. E kement diskouezadeg frouez a vez
 en hor bro, e ya bepred ar prizioù kenta gantañ.

Hogen, ouspenn ma 'z eo eur mestr-liorzer, ne vo kavet den gouiziekok'h
 egetañ d'ober kizellerez pe skulterez war goad. N'en deus bet kentel ebet morse
 war ar vicher-ze koulskoude ; anezañ e-unan eo deuet da veza eun arzour evel
 ma n'eus ket kalz dre amañ, dre forz poania ha lakaat da greski an ijin-natur
 a zo ennañ.



Iliz-veur Kemper kizellet gant Per Nedelec.

D'an oad a dri-ugent vloaz e krogas a-zevri da gizella, kerkent ha m'en
 deveze eun tamm amzer vak bemak, ha, bremañ, eo heñvel e di ouz eur gwir
 virdi gant an taolennou kaer ha priziuz a gaver ennañ, pennoberou anezo holl.


Labouriou a bep seurt grêt gantañ, kalz anezo ker fin ha dantelez ha ken
 brao pe vravoc'h an eil hag egile, am eus gwelet e sal Per Nedelec. En o
 zouez emañ patrom an Aotrou 'n Eskop Duparc (Doue d'e bardono !) òt gan-
 tañ ar priz kenta e foar-diskouezadeg Brest ar bloaz 1950, skeudenn touriou
 ha porched iliz-veur Intron Varia Bariz hag hini talbenn iliz-veur Kemper gant
 he daou dour, ar roue Gralon etrezo, war gein e varc'h. Ar pezh-labour-mañ en
 deus bet ivez ar priz kenta, pevar bloaz 'zo, e Brest.

Hogen ar veurdusa ha souezusa skeudenn bet kizellet gant hor c'henvroad
 a zo d'am meno hini iliz-veur Sant-Kaourintin en he fez. Daou vloaz amzer
 en deus ranket Per Nedelec kaout evit dont a-benn anezi. Er bloaz 1950 e kro-
 gas ganti ha ne voe erhu nemet er bloaz 1952. Bez' he deus 1 m. 80 a hed ha
 70 cm. a lec'hed ; an touriou anezi a ra 1 m. 30 a uhelder. (Gwelet ar skeudenn.)

Dellezout a rafe pennoberou talvoudus hon arzour kavout eul lec'h a enor en
 eur mirdi a vefe dastumet ha goarnet ennañ an traou kaer bet krouet dre
 zaouarn hag ijin ar Vretoned.

Ra blijo gant an Aotrou Doue rei yec'hed ha buhez hir d'hor c'henvroad ma
 kendalc'ho c'hoaz e-pad pell da zidui hon daoulagad ha d'hon lakaat da estlammi
 gant taoliou-micher-all ken sebezus hag ar re en deus grêt betek-hen !

Yeun ar Gow.



MEULGAN AR C'HORAIZ

Ni oc'h asped, krouer ar bed,
Er C'horaiz-mañ da glevet
Ar pedennou hag an daerou
A brofomp deoc'h gant hor yunou.

C'hwi a wel e-barz hor c'halon
Kement enni a zo direiz,
Met roit dimp gras ho pardon
Pa zistroomp ouzoc'h gant feiz.

Klask a reomp gwir binijenn
Dre aluzen, yun ha pedenn,
Roit pare d'hon eneou
P'hon eus glac'har d'hor pec'hedou.

Hor c'hoantégez a gastizomp,
Ho kras gant spi a c'houlennomp,
Ma yuno ivez hor spered,
Diouz banvez hudur ar pec'hed.

Ni hoc'h asped, Dreinded sakr,
Ni a gement a zo fallakr,
Da rei d'hon eneou direiz
Adsav dre nerz ar c'horaiz.

Amen.

M. G.